

AR « BERMISION »

E-pad ar brezel ken hir ez eus bet prederiet
Penaos kavout eur remed evit ar zoudarded,
Da zerc'hel d'ezo uhel o spered, o c'halon...
Kavet eo bet!... Ha ganomp hanvet « Permission ».

Ar « Bermision », c'houi 'oar, 'zo deut-mat en hon touez :
Ar re gwsa dizablant a zihun ouz he mouez !
Adalek ma par an heol tre da veteg an noz
'Nij hor spered daveti, 'kavomp hir ar gortoz...

Eur c'hi. hag hen chadennet, dre m'oa bet lezirek,
Kerkent ha ma vez laosket, 'n em laka da redek ;
Ganomp-ni, soudarded keiz, 'c'hoarvez ar memes tra,
Ha n'eo ket eun den war varc'h a ve gouest d'hor paka.

N'oufec'h ket, e gwirionez, kompren al levenez
'Vez barr ganti hor c'halon e-kreiz hon tiegez !
Neuze, 'pad eur maread, 'sav kaozeadenno
Diwar kement tra 'zo bet c'hoarvezet pemp miz 'zo.

Neuze an holl galonou a vez laouen ha gae.
Evel ma vez an deliou 'barz ar gwez da viz Mae,
'Vel an evned, pa nijont e-kreiz an uhelder,
En eur gana da Zoue en hevelep amzer.

Met an evrusted 'vidomp ne deo ket eternal :
Ker ha kerent adarre rankomp o dilezel,
Ha mont d'an talben-brezel, du-hont pell diouz ar Vro
'Lec'h man hor muia-karet beuzet en he daero.

Kenavo, va zad, va mamm, hag a zo d'in ker ker !
Kenavo, 'ta, va breudeur, va c'hoarezed tener !
Kenavo, tud va farroz, kerent ha mignoned,
Pa guitaan, eur wech c'hoaz, va farroz Lokefret !

Neuze, war an hent en-dro, ganen eur c'hamarad,
Evit trec'hi an anken, 'ever eur chopinad,
Eur banne eus ar gwin ruz hanvet ganomp « Pinard »...
Hennez a zo eul louzou 'zo mad ouz ar « C'hafard » !

Ni a zonjo adarre en deziou tremenet
E-barz hor bro Breiz karet, e-touez hor mignoned !
Ya, ar zonz-ze a chom doun e goueled hor c'halon,
Pell goude m'emomp distro eus ar « Bermision ».

C'houi, Mestr an Nenv, an douar, pa 'z eo bras ho kalloud,
Deut, ni ho ped, d'hon diwall diouz pep droug, pep darvoud !
E-kreiz an holl drubuilheu ennoc'h hon eus fizians
'Vit ma rofec'h heb dale an Trec'h, ar Peec'h d'ar Frans.

Yann Loeiz RIVOAL.

An 10 a Ebrel, 1918, war an talben.